

(96, suite)

Ar Rubanou.

Var ton : Ar boutou bër.

Ar Rubanou

A zo ato plijet d'ar merc'het ;

Ar Rubanou

A c'honit prest o c'halonou,
 Hag eur vech ma vezont rubanet,
 Enepr o meno e vez lezet

Ar Rubanou.

(97)

Ar Rubanou

A voa goechal d'an demezellet,

Ar Rubanou

N'o guelet nemet er c'herrion.
 Merc'h coier ganto zo touellet;
 Brema partout ganti e velet

Ar Rubanou.

Ar Rubanou

A zo plijet ato d'o himor ;

Ar Rubanou

A zo evito braoigou ;
 Mes arabat event tricolor,
 Evit neuze n'o deus tam decor

Ar Rubanou.

Eur Ruban du

A zo goelloc'h ganto da velet ;

Eur Ruban du

A gavont bras diouc'h an daou du ;
 Liou all ebet ne blich d'o speret,
 Mes ganto tout e vez meulet

Eur Ruban du.

(98)

150

Eur Ruban du
 A vez ato dioc'h o zantamant ;
 Eur Ruban du
 A ro avi dezo dioc'h-tu.
 Ganta emañ o ententamant ;
 Preferi a reont d'an diaman
 Eur Ruban du.

Gant eur Ruban
 O queler oll e ribillare ;
 Gant eur Ruban
 Ral eo ma santont seurt poan.
 Ennez a zo tout eus o doare,
 Ha pa vent clàn, dioc'h-tu int pare
 Gant eur Ruban.

(99)

Gant eur Ruban
 O queler e corn ar balion ;
 Gant eur Ruban
 E vezont dastrenet buan.
 Neus fors piau a yêlo ibiou
 O quelo sur en o c'hoariou
 Gant eur Ruban.

(Vol. II, p. 96-99.)